

KANTIK AR ZEIZ SANT

Komzou : Job an Irien

Muzik : Christian Desbordes



1. Klas - ket ho - peus dremm or Zal - ver Héb o - ber neus, héb chom a - zav
 2. Dou - gen - net 'peus héb koll fi - ziañs Poan - (n) iou ho tud a ga - lon vad.
 3. Be - vet ho - peus an dru - ga - rez E - vid péb dén en eur béd foll
 4. Rag c'hwil 'zo c'hoaz 'vid ho preu - deur War hent ar peoc'h 'vel tou - riu - tan,
 5. Mor - se n'ho - peus bet e - han - (n) et Da be - di stard 'vid tud ar vro



1. E heu - liet 'peus gand feiz se - der E - vi - tañ 'peus le - zet pép tra.
 2. Gouest - let e oac'h d'an es - pe - rañs A vag an hent da - ved an Tad.
 3. Ran - nit gan - (n) eom ar ga - ran - tez A gresk an dén hag ar béd oll.
 4. Pa gouez 'n eun taol samm ar gwal - leur E kan - (n) om deoc'h a - greiz or poan.
 5. Des - kit, deom - ni pe - le - ri - ned War o rou - dou, hent or gwir vro.

Diskan :

Malo, Brieg, Tudwal, Paol, Samson, Patern, Kaourintin. (2 w.)

1. Klasket ho-peus dremm or Zalver
Héb ober neus, héb chom a-zav
E heuliet 'peus gand feiz seder
Evitañ 'peus lezet pép tra.
2. Dougennet 'peus héb koll fiziañs
Poaniou ho tud a galon vad.
Gouestlet e oac'h d'an esperañs
A vag an hent daved an Tad.
3. Bevet ho-peus an drugarez
Evid péb dén en eur béd foll.
Rannit ganeom ar garantez
A gresk an dén hag ar béd oll.
4. Rag c'hwil 'zo c'hoaz 'vid ho preudeur
War hent ar peoc'h 'vel touriou-tan,
Pa gouez 'n eun taol samm ar gwallleur
E kanom deoc'h a-greiz or poan.
5. Morse n'ho-peus bet ehanet
Da bedi stard 'vid tud ar vro
Deskit, deom-ni pelerined
War o roudou, hent or gwir vro.

CANTIQUE DES SEPT SAINTS

R: Malo, Brieg, Tudwal, Paol, Samson, Patern, Corentin.

1. Vous avez cherché le visage de notre Sauveur
Sans faire semblant, sans cesse.
Vous l'avez suivi d'une foi tranquille,
Pour Lui vous avez tout quitté.
2. Vous avez porté, sans perdre confiance,
Les peines des gens de bon cœur.
Vous étiez voué à l'espérance
Qui nourrit la route qui mène au Père.
3. Vous avez vécu la miséricorde
Pour chaque homme dans un monde fou.
Partagez nous l'amour
Qui grandit l'homme et le monde entier.
4. Car vous êtes encore pour vos frères
Sur la route de la paix comme des phares,
Quand tombe tout d'un coup le fardeau du malheur
Nous vous chantons au cœur de nos peines.
5. Vous n'avez jamais cessé de prier
Fermement pour les gens du pays.
Apprenez, à nous pèlerins
Sur vos traces, la route de notre vrai pays.